



KANTIKOU

PARRIS

Saint-Johnneg



PARRIS

1848

1848

1. — Itron Varia Wir-Zikour

Ton: *Itron Varia Rumengol.*

*Itron Varia Wir-Zikour,
Ni ho ped c'hoantek d'hor rekour;
C'houi eo kenta alvokadez
Evit pec'her ha pec'herez.*

1

Gwerc'hez dispar ha galloudek,
Bezit sikour Sant-Thegonneg;
Dalc'hit sonj mat oc'h patronez,
Patronez karet hor parrez.

2

Gant hon tud koz oc'h bet pedet,
Hag aman kalz pelerined
A zirede a-dost, a-bell,
Da c'houlenn ho skoazell zantel.

3

Dreist-holl 'teue mortoloded,
Ho peze war vor diwallet,
D'ho trugarekaat a-galon
'Vit bennoz ho proteksion.

4

Ennoc'h 'man ato hor fizians,
Ennoc'h ato hon esperans;
En deiz ma 'z omp bet badezet,
Deoc'h-c'houi, Gwerc'hez, omp bet gwestlet.

5

Warnomp ha dirak ho skeudenn,
Ar beleg, gantan eur stol wenn,
En deus lennet an Aviel:
Aman pep den 'zo d'eoc'h bugel.

6

Aman ouzoc'h 'n em erbedomp:
'Vit kaout ar c'hras a c'hoantaomp
Eun oferenn a leverer
En hoc'h enor, war hoc'h ôter.

7

Aman 'c'houlenner ho sikour
Pa vez en eun ti eur c'hlanvour,
Ha pa vez poaniou gouzanvet
A gorf, a galon, a spered.

8

Aman bep hanv 'vezit pedet
Da zul, e pron an ofern-bred,
'Vit kaout an amzer a glasker
D'ar foenn, d'an eost a zastumer.

9

Aman ho koueliou 'zo miret,
Ho preuriez darempredet,
Heuliet miz Mae ha miz Here
Gant feiz krenv ha gwir garante.

10

Rak-se, Gwerc'hez, hor zikourit,
Hon difennit, hor frealzit,
Eus an eil devez d'egile
Betek ar fin eus hor buhe.

11

Dalc'hmat e plegou ho mantell
Hag etre ho tivrec'h santel,
Dalc'hit, kuzit ho pugale,
Mirit o c'horf hag o ene.

12

Hor c'halonou a zo dister,
Beilhit warno, o Mamm dener,
Ha diwallit hor sperejou
Diouz bilim ar fals-kredennou.

13

Doue, en amzer dremenet,
Er barrez en deus dibabet
Leanezed ha beleien,
Relijiuzed, misionerien.

14

Ra gendalc'ho Sant-Thegonneg,
Bepred brokus ha kalonek,
Da rei da Zoue, d'an Iliz,
Ar gwella eus he yaouankiz!

15

Gant ho sikour, o Mamm zantel,
Da Jezuz ni jomo fidel
Betek ma 'z aimp d'ar Baradoz
Da veuli Doue deiz ha noz.

J. G.

2. — SANT THEGONNEG

TON: *Vierge de Massabielle.*

*O Patron karantezus,
Ni ho ped, bezit da viken,
Gant Mamm Hor Zalver Jezuz
Gwir zikour hor parrez kristen.*

1

Abaoue m'ho peus savet
Hor parrez, Eskob santel,
Ho kalloud a zo brudet
Etouez tud Breiz-Izel.

2

Deut a-berz ar gwir Doue
Da gelenn hon tadou koz,
Ganeoc'h e teskont bale
Eün gant hent ar Baradoz.

3

Tremen a rit hoc'h amzer
El labour, e-kreiz ar boan;
Gwir Abostol d'Hor Zalver,
Eus ar bleiz e rit eun oan.

4

Gant ar bleiz ho peus trec'het,
Dre c'halloud ho purzudou,
Holl ijin an drouk-spered,
Enebour an eneou.

5

'Vit diskuilh ho santelez,
Doue 'ro eus an derzienn
Ar pare gant madelez,
Ha dour mat d'an eienenn.

6

Da heul dour-red ar Stivel,
E roit c'hoaz d'ho pugale
Gwir gomzou an Aviel
A dorr sec'hed an ene.

7

Hag hizio, Patron santel,
Gant Mari a Wir-Zikour,
E c'houlenn ho pobl fidel
Ho kaout evit difennour.

8

Hon tud koz, dre garantez
Evidoc'h, evit Mari,
A gave eun nerz nevez
Da gaeraat bemdez ho ti.

9

Hoc'h iliz hizio brudet,
Ar c'halvar, an tour uhel,
Ar chapel ker kizellet
'Zo labour ho pobl santel.

10

Ni ho ped, Patron karet,
Mirit e doujans Doue
Kalonou ar Vretoned
'Zo bepred ho pugale.

11

Grit ma vo pep tiegez
Ato eun ti a bedenn,
Ha lakit gwir garantez
En hor familhou kristen.

12

Grit d'an tadou, d'ar mammou
Kelenn mat o bugale,
O diwall diouz al leoriou
Ha diouz ar skoliou dizoue.

13

Roit furnez d'ar yaouankiz,
Pasianted d'an den koz,
Grasou d'an dud a Iliz
D'hon hentcha d'ar Baradoz.

14

Ha pa vo deut eur hon tremen
Ni ho ped, o Patron mat,
Hor c'hasit en ho kichen
D'an Nenvou, da di hon Tad.

J.-L. JÉZÉGOU.

3. — Santez Berc'hed

TON: *D'Hor Mamm Zantez Anna.*

5

En dizro c'houi ' gollas
Ho pried ken karet ;
Intanvez c'houi ' jomas
Gant planédenn galet.

6

Gwir eo, Jezuz a ro
D'e yignoned gwella
Ar c'haliuriou c'houero,
Ar c'hroaziou pounera.

7

Poan douget 'vit Doue
A zo eur berlezenn
A lugerno en Ne
En-dro d'hor c'hurunenn.

8

Intanvez, c'houi ' zavas
Bepred ho pugale
Trôet warzu ar Groaz,
E karantez Doue.

9

Erfin, dre zantelez,
C'houi ' zilezas ar bed,
A yeas da leanez
En Urz ho poa savet.

1

Er Stued oc'h ganet
A gerent pinvidik,
Madelezus meurbet
'Vit an dud reuzeudik.

2

'Vit senti ouz ho tad
Oa ret d'eoc'h dimezi
D'eur Prins anavet mat,
Vulfon a Nerisi.

3

Doue d'eoc'h a rôas
Eur familh niverus :
Eiz bugel a deuas
D'ho renta evurus.

4

Ganto hag ho pried
C'houi ' reas, gwreg zantel,
Pelerinaj brudet
Sant Jakez Kompostel.

10
 Urz kaer Santez Berc'hed
 'Zo bet brudet gwechall
 Estreget er S'ned,
 E Bro-Zôz, e Bro-C'hall.

11
 Pasion Hor Zalver,
 Seiz Glac'har ar Werc'hez
 'Voe dalc'hmat ho preder
 Hed-ha-hed ho puhez.

12
 Rak-se Jeruzalem
 Ho peus c'hoantêt gwelet,
 Mont betek Betlœem,
 Kana ha Nazaret.

13
 E kêr Rom oc'h marvet,
 Karget a veritou;
 Kerkent oc'h bet galvet
 Gant Doue d'an Nenvou.

14
 Breman, er Baradoz,
 Pedit 'vidomp Doue;
 Goulennit e vennoz
 D'hor c'horf ha d'hon ene.

15
 Dreist-holl, grit ma chomo
 Doun ha start en hor c'hreiz,
 'Vel griziu an dero,
 Griziu santel ar Feiz.

J. G.

4. — Santez Thereza ar Mabig-Jezuz

TON : *Kalon dous a Vari.*

DISKAN :

Meulomp, meulomp Santez Thereza !
 Meulomp, meulomp Santez Thereza !

1
 Da zantez Thereza
 Ar Mabig-Jezuz
 E teuomp da gana
 A galon eürus.

2
 « Alençon » he gwelas
 O tont 'barz ar bed;
 E « Lisieux » e vevas
 Hor Zantez karet.

3
 Yaouankik 'tibabas
 Jezuz da Roue :
 D'Ezan en em rôas
 'Vit he holl buhe.

4
 Outan ne zinac'ho
 Birviken netra,
 'Vitan e c'houzanvo
 Ar poaniou brasa.

5
 Pa rene he dek vloaz
 'Klanvas da vervel;
 Trumm avat 'vourc'hoarzas
 Mari d'he bugel.

6
 Pelloc'h e resevas
 Bara an Elez;
 Gantan nak e tridas
 Kalon ar bôtreiz!

7
 Kerkent ha pemzek vloaz
 Gant mall d'ar C'harmel
 'Vel eur goulm e nijas :
 Eno 'vo eun êl.

8
 El a basianted,
 El a vaillhantiz,
 Er yec'hed, er c'hlenved,
 El a zakrifis.

9
 Dous, humbl, madeleuz
 Ha seder veze;
 Ganti edod eürus,
 An holl her c'hare.

10
 « Doue, war a lare,
 N'eus tad 'bet 'veldan;
 Doue ne vez morse
 Re 'fizians Ennan. »

11
 Gantan 'vel eur bugel
 En em gompportas,
 Ha da veza santel
 Buan e teuas.

12
 'Vel eur bugel ive
 E vevas bepred
 Gant he Mamm eus an Ne
 He deus ken karet.

13
 Pevar bloaz war 'n ugent
 E oa pa varvas :
 War eün eus ar gouent
 D'an Nenvou 'pignas.

14
 « Ober vad d'an douar
 O skuilh eur glô roz, »
 Setu petra lavar
 'Vo he Baradoz.

15
 Skuilhit 'ta ho krasou,
 Skuilhit roz warnomp;
 Bras eo hon ezommou,
 Truezit ouzomp.

16
 Goulennit ar pare
 'Vit hor c'hanvourien,
 An dizro hep dale
 'Vit hor pec'herien.

17
 Goulennit ar furnez
 'Vit hor bugale
 Hag, o gwella danvez,
 Glanded an ene.

18
 'Roit d'an den pinvidik
 Eur gwir garantez
 Evit ar reuzeudig
 'Zo en dienez.

19
 Diwallit an Iliz,
 Ar Frans, an Arvor,
 Ha mirit o frankiz,
 O brud, o enor.

20
 Ra gouezo puilh warnomp
 Ho roz, ho krasou!
 Goulennit evidomp
 Digor en Nenvou.

J. G.

5. — Otrou Person Santel Ars

TON : *Eürus an hini a garo Doue.*

*Otrou, Person Ars, Sant Yann Vianney,
Deskit d'eomp bale eün gant hent an Ne.*

- 1 Abred c'houi 'glevas mouez dous Hor Zalver :
« Bez beleg, bugel, pign ouz an Oter. »
- 2 Mari ho karas dalc'hmat 'vel eur vamm,
A veilhas warnoc'h, ho miras divlamm.
- 3 C'houi eus ho kostez, evel eur bugel,
A garas Mari, ar Werc'hez Santel.
- 4 Pelloc'h beleget, da Ars oc'h hanvet,
Ar falla parrez a oufed gwelet.
- 5 Buan Ars 'jenchas 'vel eun all 'n he flas
Dre ho labouriou, gant sikour ar c'hras.
- 6 Piou a nivero ho prezegenou,
Ho kovesionou, ho katekismou?
- 7 Noz-deiz hep chan, 'pad daou-ugent vloaz,
Nak o deus douget ho paour-kêz diouskoaz!
- 8 Piou laro ouspenn ho pinijennou,
Ho yuniou kalet, nerz ho pedennou?
- 9 Rak c'houi a ouie, goude labourat,
Hep pedi, gouzany, n'heller ober vad.
- 10 Eneou prenet gant Kroaz Hor Zalver
'Vez ato salvet gant kroaziou pouenner.
- 11 Dre-ze ho korf paour ho peus kastizet
Ha poaniou garo ho peus diwasket.
- 12 Nak a zroug avat 'peus diarbennet,
Nak a bec'herien 'peus konvertiset!
- 13 Brud ho santelez, brud ho mirakloun
A dennas da Ars tud a vandennou.
- 14 War an douar-man ho kalloud oa bras,
En Nenvou hizio ez eo brasoc'h c'hoaz.

- 15 O beleg santel, pedit ma savo
Kalz a veleien eveldoc'h er vro!
- 16 Ra zavint zoken, ma plij gant Doue,
En hor familhou, 'tuez hor bugale!
- 17 O Person dibab, skouer ar Bersoned,
Bleinit ac'hanomp breman ha bepred!
- 18 N'hon dilezit ket da eur hor maro,
Hor c'hasit ganeoc'h d'an Nenv, hor gwir bro !

J. G.

6. — Kenta Kantik an Oferenn

Adalek ar penn-kenta betek fin ar Gredo

TON : *M'hoc'h ador, ma Doue, ma C'hrouer.*

- | | |
|---|--|
| 1 | 5 |
| Kinnigomp holl ar zakrifis
Gant Hor Mamm Zantel an Iliz,
Sakrifis divin Hor Zalver
'En em ginnig war an ôter. | Gant ar beleg a-greiz-kalon
Eo da genta goulenn pardon,
Pardon evit ar pec'hejou
'Deus sklabezet hon eneou. |
| 2 | 6 |
| Epad ar zakrifis avat
'N em unani rankimp dalc'hmat
Gant ar beleg a zo brema
Dirazomp oc'h oferenna. | Gant ar beleg eo d'eomp pedi
Ar zent hag ar Werc'hez Vari
'Vit m'hor zikourint penn-da-benn
Da ginnig mat an oferenn. |
| 3 | 7 |
| Ar pezh a ray ouz an ôter
E tleimp eveldan hen ober :
E oferenn a vo neuze
Hon oferenn d'eomp-ni ive. | Gant Mari ra vo skrivet don
Pemp gouli Jezuz 'n hor c'halon,
M'en em zalc'himp 'harz an ôter
'Veldi e tal kroaz Hor Zalver! |
| 4 | 8 |
| Taïvoudus bras ' vo evidomp,
Eennoz Doue ' denno warnomp:
Estreget her c'hlevet a rimp,
Gant ar beleg her c'hinnigimp. | Gant ar beleg ra glevimp holl
Kenteliou kaer an Abostol:
An Ebestel evidomp-ni
O deus skrivet o Liziri. |

9

Klevomp ouspenn komzou santel
Hor Zalver en e Aviel,
Gourc'hemenn al Lezenn-Nevez,
Gourc'hemenn bras ar Garantez.

10

« Bugale oc'h, 'me Hon Otrou,
D'ar memes Tad 'zo en Nenvou:
Evel breudeur ' rankit bepred
War an douar en em garet. »

11

Pardonet d'eomp hor pec'hejou,
Sklerijennet hor sperejou,
Gant ar beleg dre ar « Grede »
E fleomp pelloc'h hor feiz anzaou.

12

Hor feiz dispont, hor feiz divrall,
Evel hini hon tud gwechall:
« Start eo hor c'halon en hor c'hreiz
Ha startoc'h ar Groaz en hor Breiz. »

Adalek fin ar Grede betek ar Gorreou

TON : Elez eus ar Baradoz.

- 1 Elez eus ar Baradoz, hor zikourit brema
Da ginnig gant ar beleg ar gwin hag ar bara
A vezo dre eur mirakl war an ôter chenchet
E korf hag e gwad Jezuz, Hor Zalver benniget.

Met kinnig a raïmp ive gant ar gwin, ar bara,
Ar poaniou, an trubuilhou hon eus da ziwaska;
Gant Kroaz Hor Zalver Jezuz, pa vezint unanet,
Kentoc'h, gwelloc'h gant Doue e vint digemeret.
- 2 Kerkouls an dour a gemmesk ar beleg gant ar gwin
Da verk hor poaniou, kroaziou, gant re Hor Mestr divin
Da veza holl kemmesket, evit gellout neuze
Meritout d'eomp trugarez, bennoz, grasou Doue.

O va Otrou, va Doue, dre Galon Zakr Jezuz,
Dre Galon Dinam Mari, va Mamm vat, galloudus,
Deoc'h e kinnigan pep tra, va c'horf ha va ene,
Va c'halon ha va spered, va yec'hed, va buhe!
- Deoc'h hizio e kinnigan, Otrou, d'an nebeuta,
Ar poaniou 'm eus gouzanvet epad ar zizun-;
Hag a-vreman ' ginnigan re ar zizun da zont,
N'eus forz penos, pe vare, nak a be leac'h ' teufont.

Eus an eil sizun d'eben e fell d'in evelse
Gouzanv, pedi, labourat evidoc'h, va Doue,
Ha reseo sikour, skoazell, bep sul, en oferenn,
'Vit gellout epad eiz dez dougen va flanedenn.

- 7 An ofern ' vo evidon eun tenzor burzudus,
Eun tenzor bep sul digor a c'hrasou presius;
An ofern ' vo evidon heol skedus va buhez
Da skuilh warni, bep sizun, sklerijenn, levenez.

Adalek ar Gorreou betek ar Gommunion

TON : Adoromp holl.

- 1 Adoromp holl, diskennet war an ôter,
Gwir Vab Doue, Jezuz, Hor Mestr, Hor Zalver ;
Adoromp gant doujans e gorf, e wad divin,
Kuzet dindan spesou ar bara hag ar gwin.
- 2 War an ôter, evit hor zilvidigez,
E zakrifis nevezi a ra bemdez
' N eur ginnig evidom kement a c'houzanvas,
Poaniou e Bastion, e varo wad ar groaz.
- 3 War an ôter, evel war menez Kalvar,
D'e Dad Santel, trugarezus e lavar :
« 'Vit an dud, va breudeur, pardon, pardon, m'ho ped,
'Vito oun bet gwerzet, nac'het, krusifiet! »
- 4 N'e ket hepken evit hor zilvidigez,
Met c'hoaz ouspenn evit hor magadurez
Eman breman Jezuz er c'haltur, en hosti :
E wad ' ranker eva, e gorf ' ranker dribi.
- 5 Hag en ofern, ma n'hellomp kommunia
E gwirionez, dindan spesou ar bara,
Holl avat e rankomp gant kalz devoision
Ober kommunion an dezir, ar galon.
- 6 « O va Jezuz, ho reseo na me garfel
Met pa n'hellan, gwelit c'hoant bras va ene ;
Roit d'in d'an nebeuta ho kras, ho karantez,
'Vit ma kresko dreizo bepred va zantelez! »

Adalek ar Gommunion betek fin an Oferenn

Ar Magnificat, pe c'hoaz teir gwech war don :

D'Hor Mamm Zantez Anna.

Kanomp enor ha gloar,
Dre holl war an douar,
Da Jezuz, Hor Zalver,
O chom war an Oter.

J. G.

Kantik ar Magnificat

Magnificat * anima mea Dominum.
 Et exultavit spiritus meus * in Deo salutari meo.
 Quia respexit humilitatem ancillae suae, * ecce enim ex hoc
 beatam me dicent omnes generationes. lejus.
 Quia fecit mihi magna qui potens est, * et sanctum nomen
 Et misericordia ejus a progenie in progenies * timentibus eum.
 Fecit potentiam in brachio suo; * dispersit superbos mente
 cordis sui.
 Deposuit potentes de sede, * et exaltavit humiles.
 Esurientes implevit bonis, * et divites dimisit inanes.
 Suscepit Israel puerum suum, * recordatus misericordiae suae.
 Sicut locutus est ad patres nostros, * Abraham et semini ejus
 in saecula.
 Gloria Patri, * et Filio, et Spiritui Sancto.
 Sicut erat in principio, * et nunc, et semper, et in saecula
 saeculorum. Amen.

7. — Eil Kantik an Oferenn

Adalek ar penn-kenta betek fin ar Greto

TON : *M'hoc'h ador, ma Doue, ma C'hrouer.*

<p>1 Ma fell d'eomp klevet penn-da-benn Vel ma ranker an oferenn; Eo d'eomp sonjal a-greiz-kalon E misteriou ar Basion.</p>	<p>4 E teu d'ezan spont, heug, anken, E wad a red 'vel eur c'houezenn; Eun el 'rank diskenn eus an Ne Evit frealzi e ene.</p>
<p>2 An oferenn war an ôter Eo gwir zakrifis Hor Zalver, Sacrisis bras Menez Kalvar Nevezet 'n eun doare dispar.</p>	<p>5 Pa bok ar beleg d'an ôter, E werz an trubard Hor Zalver; Fa ya d'al leor, ar Juzevien A deu gant kerdin d'e erren.</p>
<p>3 Ar beleg e traon an ôter A zigas sonj eus Hor Zalver Kouezet, stouet en angoni E-kreiz liorz Gethsémani.</p>	<p>6 An « Introït » d'eomp a ziskouez An dismegans, ar c'hoapérez A doljont warnan ouz e gas Eus al liorz da di Annas.</p>
<p>7 D'ar « C'hyrie », Per gant ar vez, Gant aon rak eur zervicherez,</p>	<p>7 Teir gwech Hor Zalver a nac'has E porz ar Pontif Kalfas.</p>

<p>8 « Dominus vobiscum » goude : Ec'h anzao Per e follente, Rak pa zell outan Hon Otrou, Ec'h en em denn o skuilh daêlou.</p>	<p>11 Ar beleg e-kreiz an ôter A verk adarre Hor Zalver Kaset breman hep trugarez Gant Pons-Pilat da Herodez.</p>
<p>9 D'an « Oremus » gwelomp mouchet Bizañ Jezuz gant soudarded : Digernez e skoont gantan, Divezet e kranchont warnan.</p>	<p>12 D'an « Aviel », e teu avat Jezuz en-dro da di Pilat : Gant Herodez eo bet gwisket Evel eun den diskiantet.</p>
<p>10 D'an « Abostol », ez eo kaset Da di Pilat gant ar Skribed : « Eun dispac'her eo, emezo, Ket eo e lakaat d'ar maro! ».</p>	<p>13 Dirak Jezuz ker gwall-gaset Gant barnerien hep lealded, Stouomp gant doujans, karantez, Gant ar vrasa anaoudegez.</p>

Adalek fin ar Greto betek ar Gorreou

TON : *Creator alme siderum.*

<p>1 Ar c'halur pa zizolêr, Jezuz hep meza a ziwisker Hag e gondaoner hep truez Da verzerenti ar skourjez.</p>	<p>5 Gwalc'h da zaouarn, barner romen, Da dorfed na walc'hi biken; Betek fin ar bed 'vo laret : « Dindan Pilat 'n eus gouzanvet. »</p>
<p>2 Bara ha gwin pa ginniger, Korf Hor Zalver a zispenner Ha dizamant, doun en e benn, E sanker spern eur gurunenn.</p>	<p>6 D'an « Orate, fratres », Pilat E ziskouezas d'ar bobl ingrat Leun-wad, digor e c'houliou, 'Vit teneraat o c'halonou.</p>
<p>3 Laket e voe d'ezan ouspenn Mantell ruz-tan ha penn-duenn, Ha pep hini e zalude Dre farserez 'vel eur roue.</p>	<p>7 Met ar Juzevien fuloret A youc'h, ma vo krusifiet : « Ra gouezo e wad hep dale Warnomp ha war hor bugale! ».</p>
<p>4 Ar beleg a walc'h goudeze E zaouarn, 'vel Pilat e re Da laret ne verite ket Jezuz beza krusifiet.</p>	<p>8 D'ar « Prefas », den digoustians, Ar barner 'zougas ar zetans Ha da vervel e gondaonas 'Vel eun torfetour, war ar groaz.</p>
<p>9 Goude « Sanctus », Jezuz 'gemer War e ziouskoaz eur groaz pouner;</p>	<p>9 Evel m'en deus kalz gwad kollet, E kouez d'an douar bep kammed.</p>

10

Pelloc'h ez eo kalz konfortet
P'en em gav gant e Vamm garet,
Ha gant Simon a Sirene,
Veronik, Merc'hed ar Jude.

11

Daou zorn ar beleg astennet
War ar c'halur 'ra d'eomp gwelet
Hor Zalver, hep klemm, oc'h astenn
Daouarn ha treid d'e vourrierien.

Adalek ar Gorreou betek ar Gommunion

1

Jezuz, goude ar Gorreou,
A ginnig 'vidomp e boaniou,
Ar poaniou kriz a c'houzanvas
'N eur vevrel 'vidomp war ar groaz.

2

'Vel war ar groaz, war an ôter,
'Lavar da Zoue Hor Zalver :
« Evit diarbenn ho justis
E kinnigan va zakrifis. »

3

« Ar zakrifis eus va buhez
A ran anezi an dilez
'Tre ho taouarn, a wir-galon,
Goude poaniou va Fasion. »

4

Da zeiz goulenn 'zo er Bater,
Selaouomp seiz komz Hor Zalver
A lavaraz abarz mervel
Diwar ar groaz, a vouez uhel.

5

Ar pardon a ro d'ar bourreo,
Ar Baradoz 'ro d'al laer deho,
Hag, evit mamm da bep hini,
Ar Werc'hez Glorius Vari.

12

Sonjomp epad ar Gorreou
Emer o staga gant tachou
War eur groaz kalet hag euzus
Hon Otrou, Hor Zalver Jezuz.

13

An hosti zakr pa vez savet,
Ar groaz 'n he flas a zo laket ;
Goude, ar c'halur pa zaver,
E red founnus gwad Hor Zalver.

TON : *Jesu, dulcis memoria.*

6

Pa dorr ar beleg an hosti,
Sellomp gant ar Werc'hez Vari
Ouz Jezuz er groaz tremenet,
Jezuz, Hor Zalver benniget.

7

D'an « Domine, non sum dignus »
'Toler c'houez vat gant korf Jezuz ;
Goudeze, pa gommunion,
Er bez e laker Hor Zalver.

8

E vez breman eo hor c'halon,
Ennan ' teu dre 'r gommunion,
Kommunion gret evit gwir
Pe kommunion an dezir.

9

A zezir e kommunion
War bouez lavaret d'Hor Zalver :
« O va Jezuz, na me garfe
' Teufec'h da vaga va enel »

10

« Met pa n'hellan kommunia,
Roit d'in, m'ho ped, d'an nebeuta
Ho karantez, ho kras santel
Breman, ato, betek mervel! »

Adalek ar Gommunion betek fin an Oferenn

TON : *Er c'henta mister glorius.*

1

Sonjomp breman e sao Jezuz
A varo da veo glorius ;
D'e vignoned en em ziskouez
O rei d'ezo kalz levez.

2

An « Oremus » a zo goude
A verk d'eomp an daou-ugent de
Ma chomas gant e ziskiapien
D'o feur-zeski, d'o feur-c'helenn.

3

« Dominus vobiscum », erfin,
A ziskouez d'eomp Hor Mestr divin
O pignat d'e rouantelez
E kompagnunez an Elez.

4

Pa vez ar venediksion,
Gwelomp gant kalz devosion
Ar Spered-Santel o tiskenn
War Mari hag an diskiapien.

5

Plijet gantan ive diskenn
Warnomp da fin an oferenn
Evit rei d'eomp hed ar zunvez
Sklerijenn, nerz ha karantez!

6

Ra jomo doun en hor spered
Sonj an ofern hon eus klevet!
Ra jomo doun en hor c'halon
Misteriou kaer ar Basion!

J. G.

8. — Kantik Hent ar Groaz

TON : *Au sang qu'un Dieu va répandre.*

Dirak an Oter vras

Heuliomp holl, heuliomp a spered
Jezuz betek ar C'halvar ;
Sonjomp en e boaniou kalet,
Sonjomp enno gant glac'har.

O Salver, leun a garantez,
Dre ho kroaz hag ho poaniou,
Grit ouzomp eur zell a druez,
Pardonit hor pec'hejou.

En eur vont d'ar stasion genta, ha goude, en eur vont eus
eur stasion d'eben, e vezo kanet : « *Sancta Mater, istud agas,
Crucifixi fige plagas, cordi meo valide.* »

Oc'h en em gaout dirak pep stasion, e kano ar beleg : « *Ado-
ramus te, Christe, et benedicimus tibi.* » An dud fidel a res-
ponto : « *Quia per sanctam Crucem tuam redemisti mundum.* »

Kerkent e vezo hanvet ar stasion, kanet ar c'hantik, ha
goude, e vezo lavaret ar Bater, an Ave, ar Gloria hag e vezo
kanet : « *Miserere nostri, Domine. — Miserere nostri* », « *Fi-
delium animæ per misericordiam Dei requiescant in pace. —
Amen.* »

Kenta stasion: Jezuz kondaonet d'ar maro.

Da Bilat, 'vit beza barnet,
Ez eo kaset Hor Zalver;
D'ar maro ez eo kondaonet,
Daoust ma oa direbech kaer.

Ha pa glev ar ketans douget,
Ne ra ket eur glemmadenn...
Pebez skouer a basianted
D'eomp-ni holl, e ziskipien!

Eil stasion: Jezuz sammet gant e groaz

Gant e vourrevien d'Hor Zalver
Setu digaset e groaz.
Hep marc'hata, e tigemer
Ar beach-se war e ziouskoaz.

Jezuz, ar c'hroaziou hor bezo
Da zougen hed hor buhez,
Grit m'o digemerimp ato
Gant gwir feiz ha karantez.

Trede stasion: Jezuz a gouez dindan e groaz

Jezuz, dinerzet e vemprou
Gant ar gwad en deus kollet,
Gouez d'an douar, hag e boaniou
Gant al lamm a zo kresket.

Dre an tourmanchou ker skrijus
Ho peus 'vidomp gouzanvet,
Grit d'eomp ato, Salver Jezuz,
Chom hep koueza er pec'hed.

Pedervet stasion: Jezuz a zigouez gant e Vamm zantel

Prestik e tigouez Hor Zalver
Gant e Vamm muia karet,
Hag o c'halonou ken tener
Gant ar boan a zo gwasket.

Kalonou Jezuz ha Mari
Rannet gant hor pec'hejou,
Ni ziwallo da nevezi
Diwar vreman ho poaniou.

Pempet stasion: Simon a zikour Jezuz da zougen e groaz

Aon a zav gant e vourrevien
Na varvie dindan e groaz:
Lakaat 'reont ar Sirenéen
A rei d'ezan eun tól skoaz.

Pa vez evidomp re bounner
Ar c'hroaziou 'rankomp dougen,
Tostait ouzomp, o va Zalver,
Plijet ganeoc'h hor zouten.

C'houec'hvet stasion: Ar Veronik zantel a zec'h e vizaj da Jezuz

En eur welet bizaj Jezuz
Sôtret holl gant kranh ha gwad,
Ar Veronik trugarezus
D'e zec'ha a gred tostaat.

'Vit an aktou da rapari
A ginnigimp d'Hor Zalver,
Digantan omp sur, evelidi,
Da gaout ive grasou kaer.

Seizvet stasion: Jezuz a gouez evit an eil gwech

Ken dinerz eo breman Jezuz
Ma kouez adarre, siouaz!
Hag er stad-se ken truezus,
E boaniou ' zo kresket c'hoaz.

O va Zalver, eur wech savet,
Ma kouezan-me a-neve,
Astennit ho torn benniget!
'Vit ma savin adarre.

Eizvet stasion: Jezuz a gomz ouz merc'hed Jeruzalem

Hen o c'helenn da skuilh daelou
War ar pec'hed. Fôz d'e boan.
War e boan, war hor pec'hejou,
Gouejomp ive hon-unan.

Pelloc'h, war an hent e tigouez
Eur rummad merc'hed eus kêr;
Hirvoudi a reont gant truez
O welet stad Hor-Zalver.

Navet stasion: Jezuz a gouez evit an trede gwech

Arok mont betek ar C'halvar,
Jezuz a gouez eur wech c'hoaz.
Daoust d'e boan ha daoust d'e c'hlac'har
A-nevez e samm e groaz.

Jezuz, 'n eur zevel hep dale,
C'houi 'ro d'eomp-ni eur gentel:
Poania ma kouezomp adarre,
Poania buan da zevel.

Dekvet stasion: Jezuz tennet digantan e zilhad

War ar menez pa zigouezas,
E vourrevien, tud diroll,
E vourrevien e ziwiskas
Dirak daoulagad an holl.

Dre ar boan ho peus gouzanvet
Er stad-se, o va Jezuz,
E paeit ar poaniou dlêet
D'an holl bec'hejou mezus.

Unnekvet stasion: Jezuz staget ouz ar groaz

Da rei evidomp e vuhez
Jezuz en deus eur c'hoant bras,
Ha pouezet gant e garantez,
En em astenn war ar groaz.

Ouz ar groaz raktal eo tachet
Dre zaouarn e vourrevien;
Ret e ve kentoc'h lavaret,
Dre zaouarn ar bec'herien!

Daouzekvet stasion: Jezuz a varv war ar groaz

Goude teir eur poaniou skrijus,
Poaniou 'vel ne voe biskoaz,
Siouaz!, setu marc Jezuz...
Stioump holl dirak e groaz!

O Mari, dre ho rann-galon
Dirak Jezuz o vervel,
Digantan goulennit 'vidon
Eur maro mat ha santel.

Trizekvet stasion: Korf Jezuz distaget diouz ar groaz

Gant daou ziskip trugarezus
E gorf sakr 'zo distaget;
'Tre divrec'h e Vamm druezus
Ez eo laket gant resped.

Pa 'z aimp dre ar gommunion
Da reseo korf Hor Zalver,
D'e reseo gant devosion
Hor zikourit, Mamm dener.

Pevarzekvet stasion: Korf Jezuz laket er bez

Setu breman e gorf maro
Sebeliet, douget d'ar bez;
Met d'an trede deiz, ac'hano,
E savo leun a vuhez.

Va c'horf-me ive a ranko
Mont hep dale d'an douar.
O va Jezuz, grit ma savo
Eun deiz d'an Neuv, leun a c'hoar.

9. — KANTIK AR BASION

TON : *Au sang qu'un Dieu va répandre*

DISKAN

*O Jezuz, dre ho Fasion,
Ho pezet ouzomp truez
Ha skuilhñt down en hor c'halon
Gwir glac'har ha karantez.*

1 Jezuz e Jardin Olivet

O sonjal en hor pec'hejou,
Jezuz er Jardin stouet
A c'houez ar gwad, a skuilh daelou,
E galon a zo rannet.

2 Jezuz gwerzet gant Judas

Erru eo Judas an treitour
Gant eur vandenn zoudarded,
Ha Jezuz, 'vel eun torfetour,
A jadennoù 'zo karget.

3 Jezuz nac'het gant Per

Dre deir gwech Per en deus nac'het
Kreiz ar porz, e Vestr divin:
Ken n'en deus bet diou wech klevet
Kan ar c'hok war ar mintin.

4 Jezuz dirak Kaïfas

Kaïfas hag e Juzevien
A du ganto fals testou,
War zigarez heul al lezenn,
A glask laza Hon Otrou.

5 Jezuz dirak Pilat

Pilat a refus da genta
Sina eur zetans ken dall:
'N'heller ket kondaon, emezan,
Eun den a zo didamall. »

6 Jezuz dirak Herodez

Herodez, roue divergont,
A ra goap ouz Hor Zalver ;
Jezuz ger ebet na respont
D'eun den gadal ha muntrer.

7 Jezuz dirak ar bobl

Ar bobl holl gounezet breman
Gant arc'hant ha komzou flour
A zao e vouez enep d'ezan,
'Vel pa ve eun enebour.

8 Jezuz ha Barabas

Etre Jezuz ha Barabas
Ar Juzevien, en eun tól,
A ziskuilh eo grêt o chôaz :
Barabas 'fell d'ezo holl!

9 Jezuz skourjezet

O kredi distan o c'holer
Pilat a c'halv soudarded
Ha ganto, stag ouz eur pilher,
Jezuz a zo skourjezet.

10 Jezuz kurunet a spern

War e benn dre farz e lakont
Spern garo eur gurunenn,
Ha dirazan e taoulinont
O c'hoarzin ouz e anken.

11 Jezuz kondaonet

Er stad-se Pilat a ziskouez
Jezuz d'ar bobl kounnaret,
Met heman a youc'h digernez :
« Ra vezo krusifiet! »

12 Jezuz o tougen e groaz

War e ziouskoaz eur groaz poumer,
E kerz 'trezek ar C'halvar ;
Dindan ar zamm 'kouez Hor Zalver
Betek teir gwech d'an douar.

13 Jezuz war an hent

An Ebestel a dec'h aonik,
Met gant Jezuz 'jom fidel
E Vamm, Simon ha Veronik,
Eun nebeut gragez santel.

14 Jezuz ouz ar groaz

Ouz ar groaz pelloc'h her stager,
Tachou hir en e vemprou ;
'Bep tu d'ezan ez eus daou laer,
Brudet dre o zorfejou.

15 Jezuz en e eur ziweza

Diwar ar groaz, abarz mervel,
Jezuz da Yann ha d'eomp-ni
A ro 'vit mamm, e Vamm zantel,
'Vit mamm, ar Werc'hez Vari.

16 Jezuz tremenet

War ar groaz breman ne weler
'Met eur c'horf disliv, sklaset :
Jezuz-Krist, Hor Mestr, Hor
Evidomp 'zo tremenet. [Zalver,

17 Goude an tremenvan

An heol a guz, ar bed a gren,
Jeruzalem 'zo spontet !
Ha d'e Vamm ger, war e harlenn,
Jezuz a zo diskennet.

18 Pedenn da Vari

O Mari, o Mamm a druez,
Gant ho sikour, a-vrema,
Ni zalc'ho sonj hed hor buhez
Eus maro ho Mab hena.

10. — O Sakramant Benniget

Ton anavezet.

DISKAN

*Adoromp Doue
E Sakramant e garante.*

1

O Sakramant benniget!
Gant Doue ni 'zo maget,
Doue 'zo o chom ganeomp,
E-unan hel lavar d'eomp.

2

« Pep beleg, en va hano,
Emezan, a lavaro :
Setu va c'horf ha va gwad,
Kemerit tud a bep oad. »

3

Da vare ar gorreou,
Ar beleg dre e gomzou
A c'halv eus an Nenv Jezuz :
Ha bep gwech e teu sentus.

4

Hep dilezel an Nenvou
E teu war hon ôteriou,
Hag e chom en hon touez
Dalc'het gant e garantez.

6

En hosti n' Her gwelomp ket,
Kuzet eo 'vel eur spered ;
E pep tamm a-bez ema,
Hep na c'hellfed e ranna.

7
Neb a ya d'an dôl zantel
E stad a bec'hed marvel,
Gwir Judas, treitour euzus,
A ra eun torfed spontus.

8
Neb a ya pur e galon,
A gav eun tenzor gwirion :
Gant buhez Salver ar bed
E vuhez ' zo unanet.

9
Adoromp Hor Roue bras
En Nenvou ha war e groaz;
Adoromp Hor gwir Zalver
E Sakramant an Oter.

10
Da Zoue hor c'halonou
'Vit e holl vadoberou,
E zakramant dreist pep tra:
Holl int dastumet enna.

P. Tr.

11. — AVE VERUM

TON: *Jesu, dulcis memoria.*

1
Ni ho salud, a-greiz-kalon,
Ni ho salud, ô korf gwirion,
'Zo bet ganet evidomp-ni,
Ganet gant ar Werc'hez Vari.

2
Ni ho salud, gwir gorf Jezuz,
Bourrevet 'n eun doare skrijus
Ha lazet ouz ar groaz zoken,
Evit silvidigez an den.

3
Eus ho kostez, pa voe toullet,
Ha dour ha gwad 'zo diredet.
En hosti sakr bezit hor joa
Pa dostay hon eur ziweza.

4
O Jezuz dous, trugarezus,
Mab ar Werc'hez madelezus,
Ouzomp-ni holl pec'herien gêz
Plijet ganeoc'h kemer truez!

12. — KALON JEZUZ

TON: *Jezuz, peger bras ve.*

*Me ho ped, va Zalver,
Da rei d'in ho Kalon,
M'am bo, en ho kenver,
Eur garantez gwirion.*

1
Ho Kalon, va Jezuz,
'Zo 'vidon eun tenzor,
Eun tenzor talvoudus
A jom bepred digor.

3
Ar bed a oa skornet
Gant ezenn yen Satan :
C'houi a zo diskennet
D'e domma gant ho tan.

4
Ho Kalon, va Doue,
A zo eur forn c'horet.
Evidon e verve
Arok ma oac'h ganet.

4
Evidon e verve
O tont war an douar;
Evidon e teve
War gern menez Kalvar.

5
Kouls ha war ar menez,
Ho Kalon, va Zalver,
Evidon-me bemdez
A very war an ôter.

6
Dindan flemm ar fouetou
Hag ar spern didruez,
Ho Kalon, va Otrou,
N'oa nemet karantez.

7
Pa voe laket ar groaz
Dirak ho faoulagad,
Ho Kalon a dridas
Hag a bokas d'ar c'hoad.

8
Pa voe, gant tachou bras,
Hoc'h izili treuzet,
Ho Kalon a gasas:
« O tachou benniget! »

9
Enni pa dremenas
Houarn eur goaf garo,
Ho Kalon a davas...
Ho Kalon 'oa maro.

10
Met ho Kalon, Jezuz,
A zo beo adarre,
Warni eun nor skedus
Digor e pep mare.

11
Diskiant eo an den
A jom hep ober van,
Gant eur galon yen-yen,
Hep mont betek an tan.

12
Evidon-me, Jezuz,
Bremen me a yelo
En ho Kalon' dommus
Da jom evit ato.

13
Devit va zechou fall
E tan ho karantez;
Grit ma kerzin divrall
War hent ar zantelez.

Tad BARNABE.

13. — Promesaou Kalon Jezuz

TON: *Nous venons encor du pays d'Arvor.*

DISKAN :

*O Kalon divin Hor Zalver Jezuz,
O Kalon izel ha madelezus,
Holl a-wir-galon ni gano eürus:
Enor d'eoc'h, ô Kalon Jezuz.*

1
An dud devot mat
D'am c'halon santel
'Dezo en o stad
Sklerijenn, skoazell.

2
Etre o c'herent,
En o ziegez,
'Lakin da viken
Peoc'h ha karantez.

3

Pa vint en anken,
Gwasket gant enkreuz,
E tanvint ganen
Frealzedigez.

4

Epad ma vevint,
Me o difenno ;
Pa gimiadint,
Me o c'hennerzo.

5

War o labouriou
Va dorn a skuilh
An holl bennoziou
'Hellan rei d'ezo.

6

Pec'her, pec'herez
'Gavo em c'halon
Mor an drugarez,
Remed ha pardon.

7

An ene klouar,
Ouz tan va c'halon,
A gavo hep mar
Karantez gwirion.

8

An ene fidel
A vo fideloc'h,
An ene santel
A vo santeloc'h.

9

Ganen va-unan
Bennoz vo skuilh
En ti 'vo ennan
Va c'halon gwelet.

10

Ministr an ôter
Em c'halon ' gavo
Da douch ar pec'her
Kement a glasko.

11

Hano 're skigno
Va devosion
'Vo evit ato
Skrivet em c'halon.

12

Neb gommunio
Nao gwener kenta
Baradoz ' dezo,
Sur e c'hell beza.

14. — Ar vuçale d'ar Werc'hez

TON : *Creator alme siderum, pe Mari, Hor Mamm garantezus.*

*Mari, Hor Mamm, Hor Patronez,
Selaouit ho pugalligou ;
Astennit d'eomp gant karantez
Ho torn bepred leun a c'hrasou.*

1

En hor c'havel, hon eus desket
Meuli hoc'h hano dudius ;
En hor c'halon eo bet skrivet
Hanoiou Mari ha Jezuz.

2

Pa rank gounit e damm bara,
Ar vuhez a zo rust d'ar paour ;
Met evit e sklerijenna,
Ar feiz 'zo eur steredenn aour.

3

Hor feiz, setu hon holl denzor,
Heritaj kaer hon tadou koz ;
Setu an alc'houez a zigor
Evidomp holl ar Baradoz.

4

Ni fell d'eomp epad hor buhez
Miret hon tenzor presius,
Miret d'hor Mamm hor c'harantez
Ha beza fidel da Jezuz.

5

Met an dud fall 'zo kounnaret
Enep Jezuz, e lezennou ;
C'hoant o deus e ve diframmet
Ar feiz koz eus hor c'halonou.

3

Er vrezel a zo diskleriet
Da ene ho pugale baour,
Mamm zantel, n'hon dilezit ket,
Gwerc'hez Vari, deut d'hor zikour.

7

Torrit golloud an drouk-spered,
Kuzit dindan pleg ho mantell,
Itron Varia benniget,
Bugale vihan Breiz-Izel.

15. — Ar « Memorare »

TON : *Santex Mari, Mamm Doue.*

- Gwerc'hez, leun a drugarez, ho pezit sonj bepred
N'eus bet klevet lavaret biskoaz gant den ebet
E ve ganeoc'h digouezet awechou dilezel
Neb a zeue davedoc'h da c'houlenn ho skoazell.
- Deut oun ive gant fizians, Gwerc'hez ar gwerc'hezed ;
Dirazoc'h, gant hirvoudou, pec'her paour, oun stouet ;
Arabat, ô Mamm Jezuz, disprijout va c'homzou ;
Selaouit gant madelez ; roit d'in va goulennou.

J. B.

16. — Laudate Mariam

Ton anavezet.

DISKAN :

*Laudate, laudate,
Laudate Mariam!*

1

Laudate! Mamm zantel,
Dreist an oabl skedus,
Hor c'halonou fidel
A bigno joaius.

2

Ra jomot Hor Mestrez,
Steredenn ar mor,
C'houi eo Hor Rouanez,
Rouanez Arvor.

3

D'ar pardaez er grasou,
E ti pep Breizad,
Gant Jezuz, Hon Otrou,
Ho pedomp dalc'hmat.

4

War lein ar meneziou,
Ar pastor denved
Warzu bolz an Nenvou
A lavar bepred.

5

War e vagig dister,
Ar mortolod paour
'Lavar d'e Vamm dener
Gant eur galon aour.

6

Gant an oad daoubleget
An tad-koz en ti,
Diskabell daoulinet,
N' ehan d'ho pedi.

7

An êlig mailhuret
En e gavel striz,
Epad ma 'z eo kousket,
Ho ped en e c'hiz.

8

Breiziz a vihanik
Betek ar maro,
O c'halon birvidik,
Laouen a gano.

9

E palez kaer Jezuz,
Bodet dizoursi,
Eun deiz ni vo eürus
En-dro da Vari.

17. — O Tad Mager Jezuz

TON : D'Hor Mamm Zantez Anna.

*Jozef, Sant galloudus,
O Tad Mager Jezuz,
Dalc'hit ho pugale
E gras santel Doue.*

1

Na dous-d'ho karante
Kaout eur Mab 'zo Doue!
Dousa, kaera amzer
Beva gant Hor Zalver!

2

Jezuz 'tre ho tivrec'h
Deoc'h-c'houi na skanva bêc'h!
Dreist an holl denzoriou,
Tanva eus an Nenvou.

3

'Vel daou voked lili
Oa Jezuz ha Mari:
C'houi 'peus o diwallet
Gant ar bura glanded.

4

Ni, bresk 'vel eur gorzenn,
Hon eus ezomm souten;
Diwallet hon ene,
Ni vo dibec'h neuze.

5

Jozef, Sant benniget,
C'houi 'zo bet tremenet
'Tre Jezuz ha Mari:
Pegen dous angoni!

6

Skorit hon ene paour,
Pa deuy hon enebour
D'an diweza stourmad,
Patron ar maro mat.

7

Po vo dichadennet
Holl neuz an drouk-spered,
Mirit ho pugale
E karantez Doue.

8

Grit ma 'z aimp d'ho meuli,
Jezuz, Jozef, Mari,
'Treinded sakr an douar
Da virviken er c'hloar.

18. — O Sant Jozef, bezit meulet

TON: *Peger kaer ez eo Mamm Jezuz.*

*O Sant Jozef, bezit meulet,
O Tad Mager Salver ar bed,
Pried Gwerc'hez ar gwerc'hezad.*

- 1 Sant Jozef eo skouer an dud vat,
Yaouank ha koz, tud a bep oad,
Paour, pinvidik, hag a bep stad.
- 2 Livirit d'in, Patriarched,
En amzer goz c'houi ker brudet,
Hag ho furnez oa ker parfet?
- 3 Livirit d'in, c'houi Profeted,
Ha ken lemm eo bet ho spered
Gant Doue kouls sklerijennet?
- 4 Abostol mat, Kannad eürus,
Uhel ho karg hag enorus,
Jozef 'zo tostoc'h da Jezuz.
- 5 Elez santel hag Arc'helez,
Bras eo ho kloar, ho levenez,
Jozef 'zo tostoc'h d'ar Werc'hez.
- 6 Ebarz an Nenv, 'kreiz an dudi,
'Kichen Jezuz, 'kichen Mari,
Sant Jozef, d'eoc'h mil meuleudi!

19. — Kristenien da viken

Ton anavezet.

*D'Hor Mamm Zantez Anna,
D'an Itron Varia,
D'Hor Zalver benniget
Ni vo fidel bepred.*

1

Hor c'halon baour mantret
Gant glac'har hag enkreuz,
Ni a zo daoulinet
Dirazoc'h-c'houi, Gwerc'hez.

2

Kurun hag avel foll
Warnomp 'zo dirollet,
Hor bro 'zo vont da goll,
Truezi, Mamm benniget.

3

Lezenn Doue gwechall
A rene kaer ar vro;
Hizio lezenn tud fall
He stlej eun d'ar maro.

4

'Vel eur vandenn chas mut,
Gant kounnar, noz ha deiz,
Emaint etouez ar dud
O klask mouga ar feiz.

5

Ni 'zo gwir gristenien,
Krouadurien Doue,
Savet en e lezenn,
En e zoujans ive.

6

Ni a zo kristenien
Prenet gant gwad Jezuz,
Maget dre c'hourc'hemenn
Gant e gorf presius.

7

Kristenien, hor baniel
A zo kroaz Hor Zalver,
Ni her sao soun, uhel,
Bemdez, e pep amzer.

8

Eur brezel kriz meurbet
'Zo grêt d'hor bugale.
Ahi, n'o dilezit ket,
C'houi 'zo o Mamm ive.

9

Ar falla kenteliou
'Zo dirazo laket,
Koll 'raint o eneou
E skol an drouk-spered.

10

Sempl, dinerz, ker bihan,
Ma na vent diwallet,
Abred, hep kalz a boan,
Da goll e vent kaset.

11

Petra dalv gouiziegez,
Ma kollomp hon ene?
Ar skiant, ar furnez
A. deu d'eomp eus an Ne.

12

Gwechall hon tadou koz
Brudet 'vit o furnez,
'Glaske ar Baradoz
Arok pep gouiziegez.

13

Skianchou n'int netra
Pa 'z eont enep Doue;
Ni fell d'eomp dreist pep tra
Savetei hon ene.

14

Gwerc'hez, Hor Mamm zantel,
Roit sikour hep dale;
E plegou ho mantell,
Kuzit hor bugale.

16

E pevar c'horn ar vro,
Neuze, ni holl, Gwerc'hez,
Betek eur hor maro
Ni a gano bemdez.

15

C'houi a zo galloudus
War galon Hor Zalver,
Bezit madelezus,
C'houi 'zo eur Vamm dener.

20. — Me 'zo Kristen

TON : Je suis chrétien.

3

*Me zo kristen, setu eno
Va esperans, va c'hanaouenn;
N'eus ket er bed kaeroc'h hano,
Me 'zo kristen! Me 'zo kristen!*

Me 'zo kristen, ar Spered-Santel
Ennon eun templ en deus savet.
Kerz pell, Satan! Ar pec'hed marvel
Templ va ene ne zôfro ket.

1

Me 'zo kristen, mab oun da Zoue,
Ouz e lezenn 'fell d'in senti;
D'an Nenv gantan ez ay va ene:
Pebez eurvad! Pebez dudi!

4

Me 'zo kristen, mab oun d'an Iliz,
Bepred 'karin eur vamm ker mat,
'Vili 'stourmin gant feiz, vailhantiz.
'Vel eur zoudard, kreiz ar stourmad.

2

Me 'zo kristen, breur oun da Jezuz,
Da Jezuz-Krist, Salver ar bed;
Evidon-me e Wad presius
War ar C'halvar en deus redet.

5

Me 'zo kristen, mab oun da Vari,
Mab he daelou e tal ar Groaz;
Tridal a ran pa zonjan enni
Hag e kanañ nerzusoc'h c'hoaz.

21. — Dalc'homp d'hor Feiz

TON : Sainte Religion.

DISKAN :

*Da Feiz hon tadou koz, ni Pôtrez Breiz-Izel,
Ni 'zalc'ho mat ato;
'Vit Feiz hon tadou koz hag en-dro d'he baniel
Ni holl 'en em stardo.
Feiz karet hon tadou, morse ni n'ho nac'ho,
Kentoc'h ni a varvo. (ter)*

- 1 D'ar c'hrouadur bihan, e kichenik e gavel,
E lakit eur vamm vat, en deiz evel en noz;
Er boan hag en anken, buan hi a dol eur zell
War groaz santel Jezuz... he zonj er Baradoz.
- 2 D'ar pôtr, d'ar plac'h yaouank, c'houi ziskouez hent ar furnez;
C'houi ' lavar: « It gantian, hep krena dirak den;
Yaouankiz Breiz-Izel, bezit epad ho puhez
Ato gwir gristenien ha treitourien biken. »
- 3 D'an den koz gwenn e benn, e korn an tan azezet,
O skuilh daclou a geuz war e amzer genta,
C'houi ' lar: « Bezit dinec'h, er Baradoz ' vo kavet
Eürusted peurbadus goude poan er bed-ma. »
- 4 D'an den diwar ar mêz, kerkouls ha d'an den a vor,
C'houi a ro nerz-kalon da stourm er boan ato,
Gouzout a reont en Nenv e kavint holl dor zigor;
Ar vuhez ' vo bet tenn; d'an drubuilh kenavo!!

22. — Pa laro an dud fall

TON : *Quand les méchants diront.*

- 1 Pa laro an dud fall: « Jezuz a zo trec'het,
Hag e dron a roue a jomo diskaret! »
Ra vo raktal klevet respont hor moueziou :
Da Jezuz, **Roue bras** an holl boblou,

<i>Gloar e pep lec'h, e pep mare,</i> <i>Gwir garantez da Vab Doue,</i> Roue bras an holl boblou !	} bis
---	-------
- 2 Pa laro an dud fall: « Ni a zo galloudus,
Ha ne zentimp morse ouz lezennou Jezuz! »
Ra vo raktal klevet respont hor moueziou :
Da Jezuz, **Lezennour** an holl boblou,

<i>Gloar e pep lec'h, e pep mare,</i> <i>Gwir garantez da Vab Doue,</i> Lezennour an holl boblou !	} bis
---	-------
- 3 Pa laro an dud fall: « Nac'homp, nac'homp Jezuz,
Kasomp anezan kuit, ha ni vevo eürus! »
Ra vo raktal klevet respont hor moueziou :
Da Jezuz, **gwir Brener** an holl boblou,

<i>Gloar e pep lec'h, e pep mare,</i> <i>Gwir garantez da Vab Doue,</i> Gwir Brener an holl boblou !	} bis
---	-------

- 4 Pa welimp an dud fall o kutuilh levenez,
Hag ouz poaniou Jezuz o c'hoarzin didruez ;
Ra vo raktal klevet respont hor moueziou :
Da Jezuz, **Mestr karet** an holl boblou,

<i>Gloar e pep lec'h, e pep mare,</i> <i>Gwir garantez da Vab Doue,</i> Mestr karet an holl boblou !	} bis
---	-------

Tad BARNABE.

23. — Arok kuitaat Hor Zalver Jezuz

TON : *Avant de quitter notre Maître.*

1

Arok kuitaat Hor Zalver Jezuz
Klaskomp digor en e galon;
Eno hepken e vezimp eürus,
Eno e kavimp peoc'h gwirion.

2

Gwerc'hez Vari, Mamm garantezus,
Deoc'h ive breman kenavo;
Deut d'bon ambrouk gant ho Mab Jezuz,
Pa zigouezo pred ar maro.

4

Elez Doue, mignoned fidel,
Hon diwallit ha deiz ha noz;
Displegit warnomp ho tiouaskell
Ma 'z aimp war eün d'ar Baradoz.

3

Sant Jozef, Fried glan ar Werc'hez,
Ahl, bezit truez ouz hor stad
Hor zikourit epad hor buhez,
Goulennit d'eomp eur maro mat.

5

Bezomp erfin sonj eus eneou
Hor c'herent hag hor mignoned,
Kinnigomp da verreat o foaniou
Pedenn hor c'halon glac'haret.

D'ar Galon Zakr

Kalon Sakr va Jezuz, ra viot Roue warnomp ;
Kalon Sakr va Jezuz, me gred e karit ac'hanomp ;
Kalon Sakr va Jezuz, ho pet truez ouzomp.

TOLENN

1. — Itron Varia Wir-Zikour	1
2. — Sant Thegonneg	2
3. — Santez Berc'hed	3
4. — Santez Thereza ar Mabig-Jezuz	4
5. — Otrou Person Santel Ars	6
6. — Kenta Kantik an Oferenn	7
7. — Eil Kantik an Oferenn	10
8. — Kantik Hent ar Groaz	13
9. — Kantik ar Basion	15
10. — O Sakramant Benniget	17
11. — Ave Verum	18
12. — Kalon Jezuz	18
13. — Promesaou Kalon Jezuz	19
14. — Ar vugale d'ar Werc'hez	20
15. — Ar « Memorare »	21
16. — Laudate Mariam	21
17. — O Tad Mager Jezuz	22
18. — O Sant Jozef, bezit meulet	23
19. — Kristenien da viken	24
20. — Me 'zo Kristen	25
21. — Dalc'homp d'hor Feiz	25
22. — Pa laro an dud fall	26
23. — Arok kuitaat Hor Zalver Jezuz	27

Induljans ar maro mat

Es-tre eo breman gounit induljans gaer ar maro mat. N'eus da ober nemet lavaret pe kana, eur wech en e vuhez, goude beza bet o kommunia, ar bedenn a zo aman warlerc'h; hag e vezo gounezet induljans ar maro mat evit an deiz ma rankod mervel.

Ton : *Elez eus ar Baradoz.*

O va Otrou, va Doue, n'eus forz pe seurt maro
A zibabot evidon, me fell d'in her reseo;
Eus ho torn, a-greiz-kalon, m'her reseo a-vrema
Gant holl anken hag enkreuz va amzer ziweza.

IMPRIMATUR :

Kemper, 27 Gouere 1935.

P. JONCOUR, vic. gen.